

Pa vemp eta bourrevet gant ar boan, an anken,
Kenigomp da sant Thelo heb dale eur beden,
Sur omp da ve sicouret dre he brotection,
Testeni a gemense hor beus en hor c'hanton.

Ped guech n'hor beus ket clevet an hini ma hini,
Zo bet clan gant poan speret hac ar boan izili,
Casset soken gant clenvet betec dor ar maro,
Hac a zo bet pareet n'eur bidi sant Thelo.

Ia, Doue dre ar Zant-man, a ra da gals-sicour,
En danjer deus ho bue, var zouar ha var zour,
Betec ebars en arme, e creis tan ar bresel,
Sant Thelo a voar divoal he vignonet fidel.

Rac-ze eta, tud iaouank, hen pedit gant fianç,
C'houi pere 'zo destinet da zivoal drapo Franc,
Gret oll tro he relegou aroc mont d'an arme,
Hac ho pezo guelloc'h chanç da ober ho conje.

Tadou ha mammou cristen, pedit, pedit ive,
Ho patron mad sant Thelo evit ho pugale,
Rac eneou ho pugale ve ivez en danjer,
Kercouls evel d'ho corfou pa vent pell deus ar ger.

Hon tud coz a voa devot da bedi sant Thelo,
Ni ive ho bugale dle ober henvel d'ho ;
Baleomp var ar roudou o deus gret hon tud coz,
Hag hor bezo esperanç d'ho guelet er Barados.

Diskan e fin ar c'hantio :

Dirac ho relegou,
Ni bromet, sant Thelo,
Kerset var ho roudou,
Da betec hor maro.

IMPRIMATUR :

25 Mai 1889.

F. OLLIVIER,
Vic. gén.

Kemper, moulet e ti de Kerangal

8N2-2-013

Cantic SANT THELO

Ton : Santes Mari, mamm Doue...

Guechal, e Breiz-Izel, hon tud voa patanet,
Done d'ho sclerijenna en devoa digasset
Sent evit deski dezo ar guir relijion ;
Unan demeus ar re-ze e voa hor sant Patron.

Diskan :

Ton : D'hor mamm santes Anna...

Sant Thelo, pastor mad,
Pedit vidomp Doue,
Bezit guir alvocat
Evit ho pugale.



• Bre Zaosec'ho voa panet an Aoutrou sant Thelo
Deuz a gerent providic, an nopa deus ar vro,
He dad voa hanvet Enzie, Guenhaff e voa he vamm,
Ar vro ma choment henni voa hanvet Cardigan.

Daou zra hac a zo dibot da velet assamblez,
Tud sant Thelo doa madou ha cals vertus ivez ;
Ho c'halon voa tanet gant carantez Doue,
Cetu perac o deus greet Sent deus ho bugale.

Sant Thelo a voue kasset gant he dad hac he vamm
Da skol eun den vertuzus pa voa c'hoas iaouank flamm,
Sant Dubric, a lavarar, voa he vestr skol kenta,
Hac a hadas ne ene vertuziou ar c'haera.

Buan henvel an avel, an Aoutrou sant Thelo
A rede dre ar vro-ma, pignet var eur c'haro,
Evit cass sicour guella d'an dud-clan, d'ar beorien,
En eur ranna etrezo he damic aluzen.

Mar boa Thelo damantus e kenver he nessa,
En he genver he-unan n'oa ket ar memes fra,
Rac iun a rea aliez ; vit goele da gousket,
Hor sant Patron n'en devoa nemet eur-mean kalet.

An drouc-speret, counnaret o wel he santelez,
A glaskas coll sant Thelo dre ar fallagriez ;
Poulza reaz merc'het fall da vonet d'he denti,
Mes ker e coustas dezo, sivoas ! ho falloni.

Doe zivoalle Thelo, hac hon doa permettet
Ma viche ar merc'het-ze ractal diskiantet ;
Biscoas n'o devoa gellet mont betec sant Thelo,
Caer en doa an drouc-speret hegasi anezo.

Tud ar vro pa doa klevet petra c'hoarvezas,
O devoa evit Thelo goude eur respet bras ;
Kals a baianet soken zistroas ous Doue,
Eur roue bras hac he dud e voa deus ar re-ze.

Vardro ar blavez pemp kant, herves a leverer,
Sant Thelo a guiteas he vro hac he garter,
Evit heulia sant David, hac ive sant Patern,
E skolach brudet Polin, hac e Jerusalem.

Patriarc'h Jerusalem, hervez ma-z-eo skrivet,
Eo a reas eun Escop deus hor Sant benniget ;
Ac'hano eo e teuas d'hor bro a Vreiz-Izel,
Da ziscoues d'hon tadoù coz ar madoù eternel.

An histor c'hoas a lavar penaos en amzer-ze
Sant Thelo en doa eur c'hoar o chom bars e Kerne,
Pehini voa dimezet d'eur c'hont, hanvet Budic,
Eun den an honorapla hac iye pinvidic.

Evit renta d'he vreur-caer an honor, ar respet,
Ar Zant, n'eur zont er vro-man, a zeas d'ho guelet ;
Mes ne zaleas ket pell gant he vreur hac he c'hoar,
Rac he galon voa distak deus traou an douar.

Thelo voa n'em gonsacret da servicha Doue,
Ha ne glaske er bed-man, nac honor, na danve ;
Nan, biscoas n'en doa sonjet en aour, nac en arc'hant,
Cass eneu d'ar Barados voa he vrasa c'hoant.

Epad seis vla ha seis mis, eo bet gant Samson
O planta bars er vro-man ar guir relijion ;
Goude voa bet Escop e Landaff, en he vro,
Mes na chommas ket eno da betec ar maro.

Scoet e voa ar vro-ze gant an derzen, sivoas !
Hac a laze vell kellienn an dud, bian ha bras,
Betec al lonet soken vize ganti taget,
Ne voa vit ho farea na louzou na remet.

Oh ! pastor mad, sant Thelo n'espernas ket he boan
Evit doussad ho foanniou d'an oll, bras ha bian,
A galon vad a roas ar pezik en devoa
Vit soulagi he zenvet ha clask ho farea.

Noz deis e pede Doue da galmi he goler
Ha da zellet a drue ous he vugale ger ;
Peden ar Zant voa clevet : rac eun deis ho pedi,
Doe zigassas eun ael evit he gonsoli.

Cannad Doue lavaras d'an Aoutrou sant Thelo
Mont gant lod demeus he dud ractal er meaz ar vro,
Senti a reaz dostu ous gourc'hemen an ael,
Hac e teuas adarre en dro da Vreiz-Izel.

Darn a gret ez eo neuze a reas sant Thelo
Tro ar brocession gaer a reomp c'hoas hirio,
Evit trugarecad Doue da veza preservet
Lod deus he vugale baour gant pere voa heuilliet.

Pa voa fin d'ar c'hlenvejou, bars e bro ar C'hombri,
Deuz ar vro-man sant Thelo a ieas adarre d'hi ;
Er vro-ze eo e varvas, peus-tost d'ar guer Marden,
Vardro ar blavez pemp kant unnec-ha-triugent.

Kerquent a ma voa maro, e savas eun dispud
Divar-ben corff sant Thelo, etre tri rummad tud :
Re Landaff, ha Pennalun, ha Landeliou-Vavi,
Eo an tri rumm a glaske he gorf da anterri.

Tud Landaff o doa erfin gonezet ar victor,
Hac eno oa interret hor patron, hor pastor.
Var he vez a c'hoarvezas niver a viracou,
Aroc ma voa digasset deomp-ni he relegou.

Setu aze, cristenien, eul loden, eur pennad
Deus a vuez sant Thelo, hor patron hac hon tad,
Pehini en deus guechal plantet e Breiz-Izel
An had a gomzou Doue, hanvet an Aviel.

Tud a parrez Landelo, o c'houi a zo evurus
Da bossedi eul loden deus he gorf precius ;
Dougit eta gant respet relegou sant Thelo,
Ha kersit var he roudou da betec ar maro.

Hiniennou ac'hanoc'h o do poan marteze,
Evel sant Thelo guechal o servicha Doue ;
Mes na gollit ket contrach bars e creis ar gombat,
Sonjit ho peus bars en env eur Zant vid avocat.